

MEZ DA LANDREGERIZ !

75

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz,
Renet gant penn ~~o~~ foll ;
Hoc'h honor dirag Breiziz
A zo eät da goll.

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz,
Ne doc'h mui kristenien ;
D'enebour braz an Iliz
'Peuz savet eur skeuden !

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz ;
Bugale sant Erwan,
A zo deuet (tra iskiz !)
Bugale da Renan.

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz ;
Elec'h pelerined,
D'ho kær zo deut euz Pariz]
Bandennou hailhouned.

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz,
A resev Komb gant prez,
Ar c'hoz Komb a ra bemdeiz
Brezel d'ho feiz, d'ho yez !

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz,
Lezet 'peuz, heb krozal,
Enebourien an Iliz
D'ezansi eun den fall.

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz,
A ra goab ouz Doue ;
Diouallit ! Dourn e justiz
A c'hell skei heb dale.

Mez d'eoc'h-hu, Landregeriz ;
Ne vo ken hoc'h hano
Laret nemet gant dispriz,
E pevar c'horn ar vro.

~~Euz Breizad~~
~~Euz Leonad~~ hag en deuz donjer ouz
Renan, Komb hag o mignouned.

(Krouet e Vretoned - 20 Gwengolo 1903.)